

# DESCRIPTION

12

Dimeus en antiquite everus

PE

## CHANSON

Composet voar sujet er guir blijadur dimeus er  
vuhez privet.

### COMPARAISON E TRE ER ROUE HAC ER MESSAER.

---

Princet caret gant Plutus antreet n'em recit ;  
Deut da guemer pep a rool bars n'em scén comic,  
Quitaet ho pompo vaën hac er c'hult a Venus ;  
Taufaet er plijadur a ofr dimp Silvanus.

Me ya d'essat d'assembli voar ar memes téatr  
Ar sceptr hac ar gurunen, er hy hac en danvat,  
Ar paleziou opulant, ar gloar, ar vanite,  
Ar gabanen indigent, hac en humilite.

Dimeus ma hondition a bastor en deonvet,  
Biscoas na douguis avi d'ho crandeuriou, princet,  
Evidoc'h eo cuet guir joa ar vuhez-ma ;  
Na anvianquet ho sort evurus n'em gava,

**G**anet evit en etat-se me neus-hi comeret  
**H**ep biscoas displijadar, glahar, cun, na regret,  
**O** etat a baourantez ! O buez inoçant !  
**M**e gano gant Philomel da oll agrément.

**T**e compagnon fidel deus ma soign pastoral ,  
**S**ervijer assidu , obligeant, bac leal ,  
**M**a by bepred attentif da veilla n'em hichen ,  
**T**e en dou er henta peurs e bars n'em hanoën.

**M**ignon assur hac constant hep fin de amitie ,  
**E**n em dioual an noz, env em heuil voar an de ;  
**M**es er pes a son ena admirabl da voelet ,  
**A** teu c'hoas d'am cherissa goude'n bea pilet.

**M**ar gourdrousa e teu trist hac souden e pella;  
**N**a ran nemet ober sin hac e retorn gant jou ;  
**H**e lagat affectuus voar-n'on a so fixet  
**E**vit obeissa dare pa veo comandet.

**P**elec'h cavet un ami hac a ve sansiploc'h ?  
**P**hiloctet abandonnet en Lemnos voar he roc'h  
**A**vije bet consolet , despet d'he boan cruel  
**M**a en dije bet ganta eur mignon qu'en fidel .

**E**nfin Buffon e hunan et scrivas he histoar ,  
**H**oer a neus-hi canet na vanq netra d he h'loar ;  
**N**a n'oufen quen ajouti ; he eloj a so gret  
**G**ant interpret en natur. Retornomp d'hon sujet .

Evit lacat brema bars en discusion  
 Ar pes on eus proposet; greomp comparaison  
 E tre er vuez champetr hac er vuez civic,  
 E tre er roue memes, hac er pastor rustio.

Ar hepta neus abondans, mes sourcio cruel,  
 En eil e n'eus tranquilité, douster continual;  
 Hones eo en diferans a lacon e treze,  
 Rac me a ell pe garan comandi en roue.

Petra a neus eur roue a guemet na meus quet?  
 Mar geo dreist de snjedet voar an tron curunet,  
 Mar en deus sondardet hac gardou d'en disen  
 Na vaneq netra deus a ze d'am honneur souyeren.

Evit guir ma hurunen neo quet aour melen  
 Mes ma souvoar a so absolu hac suprèm  
 Evit sceptr bars n'em dorn me meuse r houlet coat  
 Hac evit gard d'em disen me a neus eur hy mat.

Mes pes a rent a hanon c'hoas en evnrusa  
 Dimeus an oll rouane a vén voar er bed-ma,  
 E hon er souten unic deus ma zroup inocant  
 Hac hi gle o hurunen d'ho zoudardet vaillant.

Me navin quet captivet gant eur boblestranjour,  
 Ma zoudardet n'em andred na vezout quet traitour;  
 Hac ma gard n'em disennou sur n'em pales royal,  
 Na gredan quet so honneur ous ma hini hanval.

**T**est deus ar pez avança, Apollon contragnet  
**G**oude quitat en Olymp da dioual en deonvet,  
**D**eus, discoé d'en incredul en oll agreemant  
**A**sant-jont voar er c'hampagn a rent-jont florissant.

**M**uset dimeus ar Parnass inspiret d'in verriou ,  
**M**a teuin gant elocans da zépeign er charmou  
**A** zantas ar bastoret er vuez privet-se  
**P**a voelc'hont renouvelet amser Saturn ha Rhé.

**P**a vijes gant da zeonvet bars en bord er hoad  
**M**ar heuilles son da lyren gant da voëz delicat ,  
**D**'as accençhou modulus en natur a zeblant ,  
**B**ars n'eur silans profond heuilla da vouvemant.

**A**dmet a voelas souden tapisset a fleuriou  
**E**n cantonniou Thessali dre oll er plenenou  
**H**ac er goan rigorously irant er bastoret  
**G**ant eur printemps éternel n'em velas remplacet.

**E**nna vije remerquet evit dont d'as chelaou ,  
**E**n nymphes sortiat dimeus fons er c'hoajou ,  
**A**t satyr assemblez gant en Naïad gracius  
**A** dansèous un accorçhou da voës harmonius.

**N**euse er bleï ancoaë he instinct devorant  
**H**ac en tigr furius he garnajou sanglant  
**E**r leon bars en douster à chanche he furor  
**D**re un temoigng a joa e caressè er pastor.

En aigl superb bars en aër, en dragon bars er hoat,  
 Na n'em repaissent quen a gorny hac a voad ;  
 En ours hac er leopars avoa obeissant,  
 Hac oll e pardonent d'an oanet innoçant.

Me a gret guelet brema en deiou everus ,  
 En amser a zelicou en peini Janus  
 A bresantas da Saturn en hospitalite ;  
 O amzer a bligeadur ! siecle a felicite.

Quemet a neus recevet ar faculte puissant  
 Accordet d'an animal refuset ous er plant ,  
 En elemanchou memes en natur evit fin ,  
 A eprouv en effejou deus er pastor divin.

Mes allas d'en amser - se na oaquet c'hoas formet ,  
 Pandor quen redoutabl gant he boëst miliguet  
 A peini sortias maler ar raç humen ,  
 Maler a beini n'ho ré crena Lafonten .

Brema neus, nemet boneur, douster hac inoçans ,  
 Prosperite, plijadur, joanstel, esperans ,  
 Ar garante zeu da rën er valiç da cessi ,  
 Er poignou a zisparès, na neus quen a furi

Pelloc'h Rhodop hac Ismar na retentissont quet  
 Gant er c'hrion insanset dimeus er Menadet ;  
 Hac Erinys traitoures a cessas er supliç ,  
 Dimeus er chante divin caret gant Euridic,

Promethe voar er c'hocas Tity bars en Tartar  
 E n'em voelet delivret deus er vautour barbar,  
 Hac Philomel enchantet a encoaë neuse  
 En outrac'h a recevas dimeus a beurs Téré.

Biseoas charmou Orphé e, pa visitas Pluton,  
 Pa arrétas tourmenchou Sisyph hac Ixion,  
 Pa soulageas Tantal, pa enchantas Cerbèr,  
 Pa apaisas fureur Alecton hac Megèr.

Biseoas me an repet no d'oa quemet a c'hraq  
 Fel er voës melodius deus regeant er Parnass  
 Anchanteles ravissant soupiret c'hoas eur zon  
 Hac e voelin o sevel camparioù Illion !

Deus penchant er méneyou er reyer escarpet  
 A seblant n'em distagua evit dont dën hleoet;  
 En dour bar er rivyerou en em arrêt souden;  
 Er goë a so immobil hao er silans ar rën.

Pastoret lezet ho teonvet ero'hampagn da beuri,  
 No deveus mui da grena diraq er bleizi;  
 Jouisset deus ho poneur en quichen ho roue,  
 Saouret gant pligeadur er guir felicité.

Charm divin deus er speret, ô imagination !  
 Deus fournis d'in er pentur nécesser d'am c'hréion,  
 Vit traci fidelamant er spectael a osfré,  
 Compagnones Apollon bars en plenen Tempe.

Voar eur c'blasen fleurisset expres gant en natur  
 Evit bea er siej dimeus ho fligeadur,  
 Ar bastoret a deuē assidu bep mitin,  
 D'en em rangi assembles e dro d'ho mestr divin.

Ennan de ouir vignonet a conte Apollon  
 Ar jalousi anvius a goncevas Junon,  
 En quever Laton, he vam, privet deus he repos,  
 Quen a deuas da henel he mab bars en Delos.

Neuse a conte dese penos voa bannisset  
 Gant Jupiter deus an bē, vit bea distrujet.  
 Brontès, Stérop, Pyracmon, hep esperni nicun  
 Deus er Cyclobet pere a forge er hurun.

Evelse ar bastoret, evit dont da gleyet  
 Avanturiou Apollon, e lesent ho deonvet;  
 Mes er blei hac er leon, gant an oan innoçant  
 A hoarie assembles : ô spectacl ravissant!

Enfin en de a gouita ; Dian annonç en noz  
 Morphé c'halv ar bastoret da guemer ho repos ;  
 En deonvet en eur dripal a gouita er blenen  
 Hac pep hini n'em retir bars en'he gabauen.

Deja bars en Orian gant he biziet roz  
 En oror a apparels vit dissipâ en noz;

**He diou lagat a zo humid a garantez,  
Hacar scuil voar er c'hampagn un agrément nevez.**

**A boan ma hi deus lancet he reyonou quenta,  
Ma sorti er bastoret carguet dimeos a joa;  
Goloet e er montagnou a vandenou deonvet,  
Na glever a bep coste met cri a jaouslet.**

**Voar bord eur sourcien sclér curonet a lauré,  
Ar bastoret ampresset a hortos ho roue;  
Bars er leac'h-se agreabl a geajou decoret,  
Da fureur en Aquilon n'int james exposet.**

**Ar ardeur dimeusen de na neus galet biscoas  
Tarissa er sourcen-se nac goën-vi er yaot glas;  
Hac er goan rigor us neus quet galet tremen  
Cedr hueler montagnou vit disquen er blenen.**

**Ennan Chloris ar prodig er roz en anemon :  
Hac e bars er memes lea'ch donesonou pomon  
En faveur er bastoret, presantet d'ho avi,  
A vril gant mui a éclat vit froës en hesperi.**

**Bars er prajou abondant dimeus er blenen se  
Eur rivyer bordet a fleur a serpent nos ha de,  
Remonti a ra mil goec'h goude bea disquenet,  
Vae a seblant regreti eur leac'h quen enchantet.**

Ennan celebre en evnet guenet mam **Memnon**.  
 Peini a sortie dimeus guele Titon;  
 Mes Apollon a barès hac neuse e bresans,  
 Da guemet a so presant a impos er silans.

Toucha ra ous he lyren ha souden **Nereïd**,  
 Tritonet hac Syrenet a gouita **Amphitrid**;  
 En dour so abandonnet gand en Naïaded,  
 Er c'hoajou rentet desert gant en Dryadesed.

Gant eur voës melodius Apollon a gane  
**Amouroustet Jupiter e quever Semele**;  
 Neuse er pastor a danse en dorn er vergeren,  
 Hac amour deus a Cythèr a nënj en ho hichen.

Pâris bars en he galon zantas quet mui a joa  
 Pa voelas guenet Venus voar er menez Ida,  
 Vit na re er bastorel pa voelent diraze  
 En objedou agreabl dimeus o c'harantez.

Paphos neus quen a charmou da zaoulagat **Cypris**;  
 Ar bastoret d'he memoar a bresant **Adonis**,  
 Repeti ra he hano cant ha cant mil gouec'h,  
 Echo gant fidelite a respont ous he moëz.

Cesset cesset ho canyou rouanes idoli,  
 Ho carantez a neus l'ec'h da zont d'ho consoli;

**Goad en hini a glesquet a neveus gret germi  
Un Adonis immortel a ne berisso mui.**

**Mes houi pastoret everus, dign dimeus a anvi,  
Houi, a beze er boneur zo exant a ennui:  
Deut tremenet o puez e n'eur joasistet pur,  
Queit ma neo d'ec'h clota deiou a blijadur.**

**Vantet vantet-la princet bordou er sperchius,  
Devoret deus er pactol er metal precius;  
Clesquet bars er Dodon prediction a voneur  
C'hoas vit heuil er bastoret me lesò ho crandeur.**

**Pastor divin te rentas florissant en natur,  
Dre oll e voar da bajou e germe r'bligeadur;  
Clyti durant he buez a neus da cherisset  
Goude he métamorphos a teu c'hoas d'as caret.**

**Houi Ethon hac Pyroïs, Eous hac Phlégon,  
Voar eur c'haros luminant trenet c'hoas Apollon  
Oll doueou en Olymp jalous deus he voneur  
En contragn da jouissa deus he guenta faveur.**

**Mes boa ma ont adplacet ebars er firmamant,  
Da rayonou Apollon a zo muioe'h brillant,  
Hac a nep a so privet dimeus da sclerijen,  
A gemis hep esperans a bligeadur biquen.**

**Me o ped songit brema a hanoc'h ho hunan,**  
**Per'roue pe er messaër eo en evurusson;**  
**Hones eo ma etat hac ma hondition ;**  
**En queit a ma vin eanni vo jaous ma halon.**

**Er berger a zo bepreddouç, humbl hac émabl;**  
**Certen he gondition neo quet meprisabl;**  
**N'hini vit e insulti damal dean e vicher,**  
**A zo un den meprisus hoc eur speret dister.**

**Meidic te a neus gnelet ma fligeadur guenta,**  
**hac ma buez pastoral, m'amsei everusa ,**  
**Mar gra biquen er fortun din quitat ma deonvet,**  
**Te a vo c'hoas lest dimeus ma daerou a regret.**

**Hymene hac amour , quen evit finissa ,**  
**Me o ped procurit d'in er pez zezira :**  
**Ma ellin en em etat cavet eur successor ,**  
**Ha reï goude ma maro d'am deonvet eur pastor.**

**En uguenvet ar vis miê-e bars er bla presant**  
**Eo composet ef chanson en leïn ar parc en ervgampt**  
**Gant er messaër yaouanc a neubet a studi ,**  
**Ganet en parcel Mikaël en gommun Plesidy.**

**N'eur contempli gant anvi merveillou en natur ,**  
**En deveus-hi composet evit he bligeadur :**  
**Hac breman d'ar c'hriftiquer ingrat.**  
**Excusi he iguorans pa sonjo n'he etat.**

**Pastoret pa deui Atrops gant he zizail cruel,**  
**Da droha en neuden simpl deus ma buez mortel,**  
**Goude tremen bars er Stix gret ma leuiou Minos,**  
**Da reï bars en Elize d'in eur plac a repoz.**

**Pa gleofet a vin maro deut na refuset quet**  
**Ho taërou d'eur guir vignon a neveus ho caret.**  
**Scrivet neuse voar mabéz ( haes se rei ma oll gloar),**  
**« Guillou er Graët a vevo bepret en hon memoar.**

### **FIN.**